



HENTAD DIZOLEIÑ KEMPER

3 ZROIAD WELADENNIÑ



VILLES
& PAYS
D'ART &
D'HISTOIRE
DIRE

ALC'HWEZ

TRO KÊR

AN DRO A ZO ARABAT MANKOUT


UR MONT-DONT

D Loc'hañ

 Gwel kaer

 Troiad verroc'h





ADWELADENNIÑ

TRO KÊR

Un droiad kentañ evit gweladenniñ Kemper, eus kêr an Eskob betek karter ar c'houentoù en ur dremen dre fabourzh Douar an Dug.

Troid etre 2 ha 3 km

P. 5

AN DRO A ZO ARABAT MANKOUT

Kemerit amzer da vont a-hed an Oded betek karter Lokmaria, evit ur bourmenadenn hoalus.

Troid etre 2,5 ha 4 km

P.19

UR MONT-DONT

Adalek ar c'hember, choazit ur bilhed mont-dont evit ergerzhet Kemper da vare an 19^{vet} hag an 20^{vet} kantved !

Troid 2,5 km

P. 27

TRO KÊR

**3 KM (ETRE 1E30 HA 2E EVIT GWELET KÊR)
GALLOUT A REER OBER UN DRO VERROC'H
2KM (WAR-DRO 1E GWELADENNIÑ)**

**⚠ TROIAD NA C'HALL KET AN DUD
DALC'HET EN O C'HERZHED MONT GANTI**

1. Delwenn ar Roue Grallon

© Ti an Douristed Kemper Kerne

UN DRO GENTAÑ EVIT GWELADENNIÑ KEMPER, EUS KÊR AN ESKOB BETEK FABOURZH DOUAR AN DUG

**Er Grennamzer, er gêr greñv, war ribl
dehoù an Oded, e oa bodet en-dro d'an
iliz-veur stalioùigou, atalieroù, tiez-
annez nobl koulz ha parkeier ha
gwerjezoù. Eskob Kerne eo an aotrou
anezhi. Mogerioù-kreñv zo en-dro da
gêr an eskob.**

LOC'HAÑ EUS AR BLASENN SANT KAOURANTIN

1 - Iliz Sant Kaourantin

Hervez ar vojenn, ar Roue Grallon, a zo e zelwenn etre korzennoù an iliz-veur, en dije anvet sant Kaourantin da eskob kentañ Kemper ha roet e gastell dezhañ evit sevel an iliz-veur kentañ. Goude 1239 e voe kroget da sevel an iliz a vremañ ha kaset e voe al labourioù da benn a-hed meur a vloaz. An ardamezoù kizellet a-us ar porched eo re dug Breizh a baeas ar chanter e deroù ar ar 15vet kantved. Ar c'horzennoù greunit, a dap



1

betek 76 m uhelder d'ar muiañ, a oa deuet da dogañ an tourioù en 19vet kantved, ha miret eo bet kened c'hotek ar savadur en e bezh. En diabarzh, ar bolzioù a sach evezh an dud gant o liv okr ruz. Gallet ez eus bet adsevel lieslivadurioù ar 15vet kantved diwar sontadegoù e-pad ur c'houlzad reneveziñ bras kaset en-dro etre 1988 ha 2008. Dibar eo an iliz-veur abalamour n'emañ ket ar c'heur savet en 13vet kantved a-eeun gant an nev echuet daou gantved diwezhatoc'h.


Pa vezit o tont er-maez eus an iliz-veur, troit a-gleiz, er straed ar Roue Grallon. Kit tre e porzh mirdi breizhek an departamant, bet palez an eskibien.

2 - Palez an eskibien

Palez an eskibien, stok ouzh an iliz-veur, a oa betek 1906, annez eskob Kerne. El lec'h ma oa e c'halle ar prelad mont d'an iliz-veur hep tremen dre an diavaez. Er porzh ez eus daou gorf-savadur a-skouer. Ar gazel su, harpet war ar ramparzh, a veze douret gant an Oded pa veze reverzhi vras betek ma voe kempennet ur c'hae en 19vet kantved. Adstummet eo bet an annez ha brasaet gant an dud a oa bet o chom ennañ lerc'h-ouzh-lerc'h. Al lodenn



1



2

1. Diabarzh an iliz-veur

2. Goloadur koad derv biñs Roc’han, ur bennoberenn gilvizerezh

3. Liorzh ar Retred

4. Balegoù-tarzhell ouzh ar mogerioù-kreñv, gwelet a-dost


5. Stetoskop Laeneg

© Mirdi an arzoù-kaer e Kemper

gosañ a c’haller gwelet c’hoazh eo tour Roc’han, ennañ ur viñs goloet gant ur volz e stumm ur balmezenn. Savet e voe e 1507 ha kinklet eo gant balegoù-tarzhell faos, loened, delioù ha gwaregoù lakaet war aeled a zoug ardamezioù.

Mirdi breizhek an departamant

E palez an eskibien, perc’hennet gant departamant Penn-ar-Bed, emañ mirdi breizhek an departamant abaoe 1911. Er mirdi a gevredigezh-se, e tiskouezer istor, tudouriezh hag arzoù rannvroel Penn-ar-Bed dre zastumadoù puilh a draezoù arkeologel, gwiskamantoù, arbeuri ha pezhioù feilhañs. Porzh ar mirdi a ginnig ur gwel kaer war korzennoù ha gwaregoù-bount an iliz-veur.

 *Tremenit en-dro dirak porched pennañ an iliz-veur ha grit tro ar savadur evit mont war ar blasenn ec’hon, e tu an norzh.*


3 - Plasenn Sant-Kaourantin

Er Grennamer e oa ur vered en-dro d’an iliz-veur roman kentañ. Dilezet e voe war-dro 1300. Goude ma voe savet an iliz-veur c’hotek, an

takad en e bezh, lec’hiet-kaer e kroashent straedoù pennañ kêr, a voe gouestlet d’ar foarioù ha d’ar marc’hadoù. Ur c’helc’hiad daroù skilt a ziskouez pelec’h e oa post-andalc’h er Grennamer. Ouzh ar post-se e veze staget an dud kondaonet evit lakaat anezho a-wel d’an holl. Adkempennet e voe al lodenn norzh eus ar blasenn en 19vet kantved. An ti-kêr, echuet e 1834, zo a-dal da zelwenn an doktor Laeneg, krouer ar stetoskop, genidik eus Kemper.

Mirdi an arzoù-kaer


E mirdi an arzoù-kaer, savet e 1872 hag adframmet ur c’hantved diwezhatoc’h, e viret un dastumad pouezus a livadurioù eus ar 16vet kantved betek an deiz hiziv. Dibar eo, gant e zastumad livadurioù breizhat, ha kalz a daolenoù eus skol Pont-Aven en o zouez.

 *Kerzhit a-hed an iliz-veur hag he sakristiri evit mont gant straed ar Froud, troit a-gleiz er straed Toull al Laer. Er c’hroashent-tro, kit war-zu straed an Douvezioù ha grit un ehan er skwar Jean Le Roy.*



4 - Ar mogerioù-kreñv


En 13^{vet} kant e voe klozet kêr an eskob gant ur voger-greñv 1500 m douret gant an Oded er su, ar Stêr-Deir er c'hornôg hag ar Froud er reter, dindan an douar en deiz hiziv, tost ac'hann. E norzh hag e reter ar gêr ez eus douvezioù ledan sec'h dirak ar mogerioù uhel gant balegoù-tarzhell. Ar voger-greñv zo un hent-ged a-us dezhi ha kreñvaet eo gant tourioù-difenn met ne chom nemet an tour Neved.


 *E penn ar skwar, kit gant an diri a sav a-gleiz war an hent-ged. A-zehoù ez eus un diri all a gas da Liorzh ar Retred. A-gleiz, kit betek liorzh ar Retred.*



5 - Liorzh ar Retred ha liorzh ar Peoc'h

Ar liorzhoù-se, klozet gant mogerioù hag enno takadoù war liveoù disheñvel, a oa gwechall-gozh da diez chalonied an iliz-veur. Adalek an 19^{vet} kantved e oa an Ursulinezed ha goude-se Intronezed ar Retred, o chom er savadur sko ouzh al liorzh er su. Gant al leanezed e voe kempennet al lec'hioù, implijet evel bered ivez. Gant Kêr e voe prenet douaroù ar gouent e 1977. Dre m'eo troet al liorzhoù ouzh ar su ha m'int gwarezet gant mogerioù ez eus gallet broelañ plant eus an trovanoù. E liorzh ar Peoc'h, war valir a-us liorzh ar Retred, e kinniger ur bed digustum troet war-zu ar Mor Kreizdouar.

 *Pa guitaer al liorzh evit mont war-zu ar straed Elie Freron e vez sachet ar selloù davet mell penn-chantele chapel ar Jezuisted.*

 *Pa'z eer e-maez liorzh ar Retred, troit a-gleiz evit diskenn gant ar straed Elie Freron. En ur vont, sellit ouzh ar privezioù a chom e moger bignon an ti e vannoù koad a-zehoù. Kemerit ar straed kentañ a-zehoù, straed ar Barzh Kadioù.*

1. Merkoù ur c'halvez, gwelet a-dost, en niv.1 straed al Lise

2. Ostel Minuheloù en niv. 10 straed ar C'hig-sall

© Christophe Rouillat

3. Kizelladurioù ouzh ti ar C'hariatidennoù

4. Delwenn-asagn ar Breizhad bihan


5. An iliz-veur gwelet eus straed ar Gereon

© Christophe Rouillat

1



2



6 - Ti ar Pavilhon

En niv. 5 e teu anv ti ar Pavilhon eus e doenn sklent uhel he fevar bann. Chomet e oa tra skolaj ar Jezusted, a zo uheloc'hik, e-pad ouzhpenn ur c'hantved. Er 17vet kantved e voe stummet evel m'eo bremañ, diginkl ha simetrek. Servij buheziñ ar glad zo er savadur-se abaoe 2005 ha kinnig a ra d'an dud gweladennoù, atalieroù ha diskouezadegoù hervez al label Kêr arz hag istor. Teulioù a vez savet ivez gant Ti ar Glad evel anhini a heñch ac'hanoc'h hiziv.

Troît kein ouzh ti ar Pavilhon, diskennit war-zu plasenn an Amann ha kit a-zehoù da c'houde..

7 - Plasenn an Amann

War ar blasenn-se e veze dalc'het marc'had an amann el lec'h ma teue ar peizantezed da werzhañ amann-sall e podoù krag. E Breizh, kuit a dell war an holen – ar gabell – e veze graet amann-sall hag a c'haller mirout pelloc'h. E penn straed al lise ez eus tiez greunit eus ar 16vet kantved. Warno ez eus prenestroù kinklet gant gwaregoù e stumm ur grommell-baner pe damblaen-begek. Emaint a-dal d'un ti e vannoù koad, en niv.

1, ma c'haller gwelet merkoù kozh lezet gant kilvizen, merkoù engravet e stumm sifroù roman hag a dalveze evit sevel ar framm koad.

Kit gant straed ar C'hig-sall.

8 - Straed ar C'hig-sall

E-touez an tiez o bannoù koad miret, unan anezho, en niv. 10, a ziskouez ur pignon kinklet gant estajoù korbellek a zeu war an araog a-us ar straed. Gant kroazioù sant Andreo eo reutaet ar framm koad a zo leuniet gant tilh, ur wech strollet. Dont a ra ar meskaj dour, douar ha plouz, pavez sec'h, da vezañ un dafar difuiñ eus ar c'hentañ a-fet ar wrez pe an trouz. Diskouez a ra an anvioù-straed e oa aozet kêr er Grennamzer dre gorfuniadoù. Bodet e oa ar charkuterien e straed ar C'hig-sall, ar gigerien e straed ar Gigerien ma vezent o vosañ al loened war- eeun dirak o stalioù.

E penn straed ar C'hig-sall, troît a-gleiz, e straed ar Gigerien..

! *Gallout a reer mont dre ar straed Treuz ivez.*

Troît a-gleiz ur wech adarre, e straed ar Geoded.



3



4

9 - Ti ar C'hariatidennoù

Straed ar Geoded, unan eus ar savadurioù o bannoù koad zo disheñvel gant e bileroù greunit kizellet hag a daolenn maskloù oc'h ober ardoù ha hantergerfoù gant dilhad ha togoù eus ar 16vet kantved ? A-zehoù d'an antre, ur vaouez o terc'hel ur picher a zegas da soñj e oa el lec'h-se un davarn brudet eus kêr.

••• Kit a-zehoù war ar blasenn Sant-Kaourantin ha kit gant straed ar Gereon.


10 - Straed ar Gereon

Er straed-se, ma veze graet ar muiañ a genwerzh e kêr, e veze gwerzhet ha labouret al lèr gant ar gereon. Ul lodenn eus an tiez o bannoù koad a voe adsavet da-heul un tangwall a badas ouzhpenn 12 devezh e miz Mezheven 1762. Ur steuñv kêraozañ nevez a lakaas neuze eeunaat ar straed ha linennañ an talbennoù a voe da sevel gant mein hiviziken. En niv. 10 e weler un delwenn-asagn eus ar bloavezhioù 1850. Taolenniñ a ra ur peizant dindan ur gwiskamant glazik, evel ma veze gwisket e bro Kemper : ur jiletenn c'hlas brodet he gouzougenn, stardet gant ur gouriz ledan, ur chupenn verr, ur bragoù bras, gweltrou ha botoù-koad.

En tu all d'ar straed, delwenn ur plac'h gwisket e giz Pont-Aven a ziskoueze gwechall toull dor ur verserezh.

• Er c'hroasht gant straed ar Gigerien, an ti-korn, goloet a vein-glas, a lenner warnañ, dindan un delwennig, ar bloaziad 1552. Kinnig a ra, gant korzennoù an ilz-veur en adreñv, ar skeudenn arouezusañ eus Kemper.

••• Kit gant ar straed Sant-Frañsez a ziskenn betek ar c'hoc'hu.



5



1. Koc'hu Sant-Frañsez e 1968, luc'hskeudenn dazlivet e 2020

© Dielloù-kêr Kemper
3 Fi 25-09, Dastumad Patrick
Le Grand

2. Kae ar Stêr-Deir

3. Fernand Le Gout-Gérard, Plasenn Douar an Dug e Kemper, 1910

© Mirdi an arzoù-kaer

11 - Ar C'hoc'hu

Savet e oa bet ar c'hoc'hu e 1979 el lec'h ma oa unan eus an 19vet kantved, distrujet gant un tan-gwall. An doenn vras goloet a vein-glas, harpet gant ur framm e stumm kouc'h ur vag, a zegas soñj eus koc'huioù kozh ar vro. El lec'h-se e oa, er Grennamzer kouent ar Gordennerien, un urzh kesterien diazezet gant sant Frañsez Asiz. E-touez ar vreudeur frañseziz eus Kemper eo chomet Santig Du er memorioù abalamour m'en doa roet prederioù ha bezioù d'an dud klañv gant ar vosenn zu er 14vet kantved. Gwelet a reer e zelwenn c'hoazh en deiz hiziv en iliz-veur ma talc'her da azeuliñ « ar Santig Du ». Bemdez e

vez lakaet bara ouzh treid ar Santig Du evit ar re a zo ar muiañ en dienez .

●●● Treuzit pe kerzhit a-hed ar C'hoc'hu.

! Gallout a rit mont gant un hent berroc'h en ur dreuziñ ar Stêr-Deir dre ar pont Astor. En em gavout a reot war ar blasenn Douar an Dug ha dirak ar gedig – niv. 14 ha 15. Kendalc'hit goude-se war ar blasenn Medard hag adkemerit penn ho hent evel m'eo displeget er bajenn 15.

Anez, kendalc'hit gant an hentad war kae Porzh ar Gwin.



2

3

E diabarzh ar mogerioù-kreñv en em astenn Douar an Dug, ur fabourzh disrannet diouzh kêr an eskob gant ar Stêr-Deir ha lakaet dindan aotrouniezh dug Breizh. Merket eo ar barrez-se, diservijet gant iliz Sant Vaho, gant ar c’henwerzh e darempred gant ar porzh. « Douar ar c’houentoù » e veze graet eus ar c’harter-se ivez rak er 17vet hag en 18vet kantved e voe diazezet meur a urzh relijiel en tachennoù dieub.

12 - Kae Porzh ar Gwin ha kae ar Stêr-Deir

Kae Porzh ar Gwin a zegas da soñj pegen puezus e oa ar porzh evit Kemper. Aze, adalek ar Grennamzer, e veze diskarget ar gwin a zeue eus Bourdel pe eus Spagn. Pa voe savet ar c’hoc’hu, etre 1845 ha 1847, e voe adaozet ardremez kêr da vat : teir straed a voe digoret en-dro d’ar savadur, ar pont Astor a voe savet a-us ar Stêr-Deir. War c’hlann gleiz ar stêr e voe kempennet ur c’hae, kae ar Stêr-Deir, riblet gant savadurioù eus an 19vet kantved gant talbennoù unvan.

•• Kendalc’hit gant ho hent war kae ar Stêr-Deir.

13 - Ar c’hember

Diazezet e voe porzh Kemper er Grennamzer el lec’h m’emañ ar Stêr-Deir o’n em deurel en Oded. Eus ar ger « kember » e tenn kêr he anv. Dre an Oded e c’haller kas pe degas marc’hadourezh eus ar Mor Atlantel dre ugent kilometrad a gildroennoù an Oded. Ur c’hasstell bihan, hag a oa d’an dug, a oa el lec’h ma kej an div stêr oc’h ober evit douveziou naturel e-harz ar mogerioù-kreñv.

•• Kit gant ar straed Reun Madeg ha goude-se en em silit e banell ar Pebr. Troit a-zehoù evit mont gant ar straed Laeneg a zifourko dirak an ostel prevez savet gant ar avanturer Reun Madeg en 18vet kantved. Kit a-gleiz betek ar blasenn Douar an Dug.

14 - Plasenn Douar an Dug

War ar blasenn e oa ur C’hoc’hu a yeas diwar wel e dibenn ar 16vet kantved. Kreiz galloud an dug e oa ; ar Stêr-Deir hag ar straed Reun Madeg a zigore warni. Al lec’h pennañ e oa evit degas marc’hadourezh e kêr. Lakaet e vez



1



2

taosoù war ar boued, ar gwin, ar pebr hag ar spisoù all gant melestradurezh an dug a-raok degas anezho e-barzh kêr an eskob. Bevennet eo ar blasenn gant kalz a diez o bannoù koad treuzfurmet a-hed an amzer. Lod anezho o deus miret o mogerioù harz-tan, mogerioù mein hanterek evit parraat ouzh an tan a redek.

👉👉 Kit gant straed an Hiris.

15 - Ar gedig

Ar Stêr-Deir a verk ar vevenn etre Douar an Dug ha kêr an eskob, mogerioù-kreñv tro-dro dezhi. Ur gedig, un dourell evit ober ged, zo stok ouzh ar mogerioù-kreñv. Un tamm izeloc'h a-gleiz ez eus retredoù kozh a-us ar stêr. Ar straed Hiris, a hed ar stêr, a ziskouez e oa, er Grennamzer, un nor-greñv war ar c'hilann gleiz, dezhi ur pont-gwint ha div gloued. Distrujet e voe ar c'hwec'h dor a oa e kêr en eil hanterenn eus an 18vet kantved. Ne dalvezent mui da netra evit difenn kêr hag anv a oa da zigeriñ kêr evit aesaat ar mont ha dont.

👉👉 Ar gwel war ar Stêr-Deir adalek ar pont a zo bet lakaet e-lec'h ar pont-gwint eus ar Grennamzer, zo unan eus ar skeudennoù a weler war kartennoù-post Kemper.

👉👉 Lezit ar pont Medard war an tu dehoù ha kit a-hed ar stêr.

16 - Ar Stêr-Deir

Meilh-dalc'h dug Breizh a oa anezhi war al lodenn-se eus ar stêr adalek ar 15vet kantved. E 1806, pa voe digoret al lazhtioù a-dal d'ar veilh e voe roet lañs d'ar c'harter. Er pradeier war ribl dehoù ar Stêr-Deir e voe diazezet obererezhioù industriel nevez er bloavezhioù 1880. Dre ar stêr e c'halled skarzhañ dilerc'hioù ar friturioù, ar c'hivijerezhioù, al livadennerezhioù... Ul labouradeg sklas a oa sko ouzh meilh an dug. Gant ar sklaseg-se veze pourvezet industriezhioù ar boued tro-dro. El lec'h-se ez eus bremañ un hent-pourmen a gas d'ar sinema hag en em astenn a-hed ar stêr e karter ar Meilhoù Glas.

👉👉 Kuitait glannoù ar Stêr-Deir dre an eil banell a-gleiz. Treuzit straed ar Brovidañs ha kit tre e tremen an Tog Ruz dirazoc'h. Troit a-gleiz e straed an Tog Ruz.



1. Gwel kozh eus ar sklaseg e 1858

© Diellou-kêr Kemper,
4 Fi 1659

2. Ar gedig

© Christophe Rouillat

3. Kreizenn ar C'hendalc'hioù an Tog Ruz

4. Ar vediaoueg Alain Gérard

5. Kazarn kozh an arme

© Diellou-kêr Kemper,
29, Fi272,
Dastumad Villard

17 - An Tog Ruz

Straed an Tog Ruz zo anvet abaoe an 18vet kantved diwar unan eus tavarnioù stank ar c'harter. Ar straed-se e Douar an Dug a veze implijet evit mont e kêr gant an dud a zeue eus Lokorn pe Douarnenez.

Kreizenn ar C'hendalc'hioù an Tog Ruz a-vremañ, lec'hiet dirak ar vediaoueg, zo bet kempennet er c'hoc'hu kozh savet e 1937. Gant implij ar betoñs houarnet, arouez ar vodernelezh er mare-se, ez eus bet gallet digeriñ prenestroù gwer bras ha ledan.

Treuzit ar straed Falkirk.

18 - Kouent an Ursulinezed Mediaoueg Alain Gérard

Er vediaoueg, digoret e 2007 er savadur adkempennet-se, e c'haller gwelet un talbenn gwer kaerskrivet modern da vat. En a-dreñv, en-dro d'al liorz, ez eus div gazel a-skouer savet en 18vet kantved, harpet ouzh gwaregoù-bolz ur c'hloastr. Bez' ez int aspadennoù eus kouent an Ursulinezed, graet evit desevel ar merc'hed yaouank, eus an noblañs hag ar vourc'hizelezh. En em staliañ a reas an urzhioù relijiel a-vern e Kemper da-heul an adsav katolik, adalek

deroù ar 17vet kantved. Stummañ a reont ur c'helc'hiad kouentoù war an douaroù dieub e kornôg kêr.

Grit an dro d'ar savadur dre an tu dehoù evit en em gavout war ar reper François Mitterand. Treuzit al liorz Simone Veil.

19 - Ar c'hazarnioù kozh

A-hed ar c'hoariva emañ bremañ Skol europat uhel Arzoù Breizh er savadurioù savet en 19vet kantved evit reiñ bod d'ar 118vet Rejimant Troadegiezh. Drastus e voe ar Brezel-bed Kentañ evit ar rejimant-se. War vord al liorz, delwenn ur fuzuilher-mor zo o rentañ enor d'an dud marv evit ar vammvro.



1. Gwerenneg ar Basion,
ilz Sant Vaho

2. Gwerenneg ar Basion,
ilz Sant Vaho

3. Ostel Sant-Alouarn

4. Straed Sant-Nikolaz

5. Straed Sant-Nikolaz

1



2



3



20 - C'hoariva Kerne

C'hoariva Kerne a voe savet e 1998, el lec'h ma oa ur c'hazarn, evit Leurenn Vroadel Kemper. Ar savourien Nicolas Michelin ha Finn Geipel o deus empennet ur c'hensturdaleg betoñs ha dir gwisket gant koad. 700 plas zo ennañ. Empennet eo bet ar blasenn-vale ec'hon a dalvez da rakleur dezhañ evit ober ul liamm gant ar straedoù a zo stalioù enno e fabourzh Sant-Vaho.

••• Kuitait ar reper François Mitterand dre ar straed-vale a-gleiz e korn ar c'hloastr. Diskennit betek plasenn ar 118vet Rejimant Troadegiezh. Kendalc'hit a-gleiz, er straed Sant-Vaho. Treuzit ar straed Falkirk evit en em gavout war ar blasenn Sant-Vaho.

21 - Iliz Sant Vaho

An iliz-se a ziservije Douar an Dug. Eus ar 15vet ha 16vet kantved e vije ar savadur kentañ. War ar c'hloc'hdi, savet er bloavezhioù 1840, ez eus ur gorzenn er c'hiz c'hotek awenet gant hini Pontekroaz. Goude-se e voe savet, gant ar savour Joseph Bigot, korzennoù iliz Sant Kaourantin war ar memes patrom. E vab a gemeras ar garg da adsevel iliz Sant

Vaho e dibenn an 19vet kantved. Miret en doa gwerenneg ar c'heur a daolenn Pasion ar C'hrist hag a zo un testeni eus arz ar gwer-livet er 16vet kantved.

••• Kendalc'hit gant ar straed Sant-Vaho.

22 - Ar banelloù

Ar straed Sant-Vaho zo unan eus hentoù bras fabourzh Douar an Dug. Banelloù a liamm anezhi ouzh ar straed Laeneg ha straed an Tog Ruz. Banell ar C'hazenn, a-zehoù, a zegas soñj marteze eus ar varc'hadourezh prizius degaset eus ar Reter gant ar verdeerien. A-gleiz e tiskouez banell ar Bara poazh pelec'h e oa ar forn-dalc'h, ma ranke an dud dont da boazhañ o bara ha paeañ taosoù en eskemm d'an aotrou eus al lec'h, dug Breizh.

••• Kendalc'hit gant ar straed Sant-Vaho.



4



5

23 - Ostel Sant-Alouarn

E penn ar straed a-zehoù, an ostel prevez Sant-Alouarn, en niv. 7, zo dibar gant e dalbenn mein-ben, kinklet gant tresoù herverk eus an Azgvinelezh : kolonnennoùigoù ha gwaregoù-bolz damblaen-begek. El lodenn uhelañ e weler, a-bep-eil, lukanoù kromm o zalbenn ha re all tric'hornek, ar pezh zo arouezius eus deroù an 18vet kantved. Ar bloaziad 1714 a lenner war unan eus al lukanoù.

An ti zo d'ur familh martoloded. En o zouez e oa Loeiz Fañch Mari Sant-Alouarn a oa gant Youenn Gergelenn pa voe kavet en 18vet kantved an inizi en e anv. Gant Sant-Alouarn e voe kavet Aostralia e-pad ar veaj-se.

Treuzit ar blasenn Douar an Dug. Kit en tu all d'ar Stêr-Deir dre ar pont Medard. Pa viot en em gavet war ar blasenn Medard, kit a-gleiz gant straed an Dudjentil. Kemerit ar straed kentañ a-gleiz, ar straed Sant-Nikolaz.

E krec'h ar straed-se, en niv. 8, sellit ouzh ar c'hustod a zo ennañ un delwennig eus sant Nikolaz. En em gavet oc'h war ar blasenn Mesgloagen. Kit betek ar straed Brizeug.

24 - Ar blasenn Mesgloagen

Ar straed Sant-Nikolaz a hed ar mogerioù-kreñv kozh ha kas betek ar blasenn Mesgloagen. Bevennet eo honnezh gant un heuliad tiez heñvel, savet war ar ramparzh gant un embreger goude an Dispac'h.

A-dal dezho emañ savadurioù ospital kozh Sant Anton ma veze degemeret ar glañvidi hag an dud en dienez adalek an 13vet kantved. Da vare an Dispac'h e voe treuzfurmet en un ti-bac'h a oa chomet en implij betek 1990.

Distroit war ho kiz ha kemerit a-gleiz er straed Henri Jacquelin a gas da chapel gozh ar Jezuisted, lec'hiet plasenn Glaoda ar C'hozh.



1

1. Prizon kozh, Ajañs Savadurioù Frañs bremañ

2. Diabarzh chapel ar Jezuisted

3. Lizherennoù IHS

4. Penn-chantele chapel ar Jezuisted



2



3


25 - Chapel ar Jezuisted

En em staliañ a reas ar Jezuisted e Kemper e 1620 ha lakaet o doa sevel ur skolaj. Adsavet e voe ar batis e dibenn an 19vet kantved evit reiñ bod d'ul lise publik, deuet da vezañ skolaj an Tour d'Auvergne bremañ. Ar chapel, sko ouzh ar skolaj, a voe savet etre 1667 ha 1747 evit ar skolidi met gallout a raed ivez degemer ar feizidi eus an trowardroioù enni. Gant e dalbenn bras ha simetrek-kenañ ez eus dezverkoù a-fet savouriezh a gaver war an darn-vrasañ eus ar batisoù savet gant urzh ar Jezuisted : pileroù, talbenn tric'hornek, rodelloù a ra al liamm etre ul live ledanoc'h hag an eil.

☉☉☉ Ma'z it gant straed al Lise a-zehoù e tiskennit en-dro war-zu Plasenn an Amann.

☀️ Eus diskenn straed al Lise, zo tiez o bannoù koad a bep tu dezhi, ez eus ur gwel kaer war dantelez maen korzennoù an iliz-veur.





100 m



AN DRO A ZO ARABAT MANKOUT

4 KM (UR WELADENN WAR-DRO 1E30)

GALLOUT A REER BERRAAT AN DROIAD BETEK 2,5 KM

(UR WELADENN WAR-DRO 1E)


KEMERIT AMZER DA VONT A-HED AN ODED BETEK KARTER LOKMARIA EVIT UR VALEADENN DUDIUS-KAER.

Emañ karter Lokmaria el lec'h ma oa kêr Gemper da zigentañ. En Henamzer e oa ur geoded vihan gant ur porzh o kemer he lañs tost d'ur roudouz war an Oded. Er Grennamzer, ar vourc'h gall-ha-roman-se he doa lezet he flas gant abati Lokmaria, hag un iliz roman. En 18vet kantved e komañsas avantur feilhañserezhioù Kemper a gendalc'h c'hoazh en deiz hiziv er c'harter-mañ ma kaver e-leizh a arzourien.

LOC'HAÑ EUS AR PONT PICHAT


1 - Ar C'hember

Ar c'hember en deus roet e anv d'hor c'hêr. Er Grennamzer, al lec'h ma kej ar Stêr-Deir gant ar Stêr-Oded a oa aes da zifenn ha gant-se e oa bet gallet diorren obererezh ar porzh. Warhed un ugent kilometr bennak hepken emañ ar mor dre an Oded, anezhi ur stêr ma santer ar mareoù.

 Diwar ar pont Pichat, kit war-zu Menez Fruji ha troit a-zehoù a-hed ar boulouard Dupleix. Lezit ar pont Max Jacob war ho torn dehoù ha kendalc'hit war-eeun gant alezioù Lokmaria. Gant ar bourmenadenn, savet e-harz Menez Fruji kerkent hag an 18vet kantved, e c'hallit bale a-hed an dour.

2 - Ar porzh

E-pad an 18vet kantved e oa deuet ul lañs nevez d'ar porzh. Kaeoù a oa bet savet war glann dehoù an Oded. Dre ar c'halioù, anezho plaennoù war-naou evit kargañ ha diskargañ ar bigi, e oa tremenet en 19vet kantved gwin eus Bourdel, holen evit mirout ar boued, ha kenwerzh ar pesked, an houarn enporzhiet evit ar bouedvirerezh, ar glaou, ar c'hoad hag ar pri evit ar feilhañserezhioù.


 Lezit pont ar c'hal Sant-Yann war ho torn dehoù ha kendalc'hit war-eeun gant alezioù Lokmaria. Diboukañ a ra ar bourmenadenn e plasenn ar Stivell. E karter Lokmaria emaoç'h.

3 - Plasenn ar Stivell

E 1699, ar poder Jean-Baptiste Bousquet a oa erruet eus trowardroioù Marsilha evit fardañ



kornioù-butun pri tost da brioldi Lokmaria. Gant e vab Pierre, mestr-feilhañser anezhañ, e oa bet prenet un ti war blasenn ar Stivell evit ober anezhañ ar vichererezh feilhañs kentañ e Kemper. Michererezh an Ti Bras a c'haller gwelet c'hoazh en niv. 3. A-us dezhi ez eus un dourell evit gedañ donedigezh ar bigi. Er mare-hont e oa ar blasenn ul lec'h ma tiskarged an danvez evit obererezh ar vichererezh : koad, pri, traezh... Ur wazhig hag a ziskenn eus Menez Fruji, ar Stivell, a bourchase an dour dous a oa ezhomm evit dilaviñ an toaz el laouerioù greunet.

 *Kit dre ar straed Jean-Baptiste Bousquet betek ar blasenn Denis Bérardier.*

Mirdi ar Feilhañs

Dre forzh kevredañ hag en em brenañ, feilhañserezhioù ar c'harter a oa deuet da vezañ ur fabrik hepken en 20vet kantved. An embregerezh en doa bet da hêrezh dastumadoù meur a lignez feilhañserien : mouloù, pezhioù ordinal pe dibar. Abaoe 1991 eo digor mirdi ar Feilhañserezh en ur feilhañserezh kozh. Eno e weler penaos e vez fardet ar pezhioù hag emdroadur stil Kemper, a anavezet dre an tudennoù breizhat kelc'hiet gant ur c'hinkladur plant glas, gwer, melen, ruz pe glas-ruz.

Ar feilhañserezh Henriot-Kemper

Ar feilhañserezh Henriot-Kemper a zalc'h skiant ar feilhañs livet gant an dorn hag hengoun ar « c'hinklañ dre an touch », gant taolioù barr-livañ lakaet hep pozañ an dorn. En atalieroù ar vichererezh e c'haller gwelet prantadoù ar fardañ, eus an dorzh pri d'ar boazhadenn dibenn.

4 - An iliz Intron-Varia

Gouzout a reer e oa bet ur gouent gouestlet d'an Intron Varia adalek an 11vet kantved. An abati he doa roet hec'h anv d'ar c'harter : Lok Maria, al lec'h gouestlet d'ar Werc'hez. Eus ar mare-hont e chom an nev a ziskouez deroù an arz roman e Breizh. Er c'hantved war-lerc'h e oa bet savet penn roman an iliz ha lakaet ur mell tour warni. Adkempennet e oa bet an antre pennañ er 15vet kantved, ha lakaet ur porched gotek outañ. Renevezet e oa bet kement-se er bloavezhioù 1860, pa oa deuet da vezañ un iliz-parrez.

En diabarzh, en nev roman, ez eus un hollad mein-bez eus ar 14vet d'an 18vet kantved hag ivez un hent ar groaz eus 1860, anezhañ plakennoù feilhañs sterniet gant izelvosoù pri poazh. An nor en adnev er su a sko war ar c'hloastr (niv. 6).



3



4



5

☀️☀️ *Pa 'z it e-maez an iliz, troit a-gleiz ha kit e-barzh porzh ar prioldi.*

5 - Ar prioldi

En 12vet kantved e oa deuet an abati da vezañ ur prioldi – ur gouent e dalc’h un abati brasoc’h – hag evel-se e chomas betek an Dispac’h. Harp eo al lodenn goshañ eus ar prioldi ouzh an iliz, ha savet e oa bet e 1646 evel m’en gweler en enskrivadenn a-us ar skoed-ardamez e-kreiz ar fasadenn. Adalek 1664, ar prioldi en doa bet gwir da zegemer evel danvez leanezed plac’hed yaouank uhelidi ar vro. Savet e oa bet batisoù nevez evit ar predva, an hunva, kambreier ha ranndioù hag ivez lojeiz ar briolez a zo eus ar bloavezhioù 1740.

☀️☀️ *Treuzit ar porzh ha tremenit dindan ar porched e-tal deoc’h. Troit a-gleiz evit gwelet ar c’hloastr er su d’an iliz.*

6 - Ar c’hloastr

En 11vet hag en 12vet kantved e oa savadurioù al leanezed en-dro d’ur c’hloastr roman. A-zehoù e chom digorioù ar sal-chabistr anezhañ. E 1669 e oa bet savet ur palier maen-rarz a-hed an iliz hag ar prioldi. Daoust d’an

1. An Oded gwelet eus ar porzh

© Dielloù Kêr Gemper, 29 Fi 98, Dalc’had Mocque

2. Diabarzh an iliz Intron-Varia, Lokmaria

3. Kloastr Lokmaria

4. Feilhañs eus Kemper

5. Prioldi Lokmaria

enklaskoù n’ouzer ket hag-eñ e oa ur c’hloastr klok pe un tremen toet eeun d’al leanezed da vont d’an iliz adalek ar prioldi.

☀️☀️ *Kit un tammig war ho kiz war-zu ar straed Jean-Baptiste Bousquet. Kit e-barzh liorzha ar Prioldi.*

7 - Liorzha ar Prioldi

Kempennet e oa bet al liorzha-mañ e 1997 e doare liorzhoù ar c’houentoù e mare Anna Vreizh, war-dro 1500. Renket eo en-dro d’ur feunteun. An alezioù karrezennet a stergn karrezioù uhelaet evit bezañ en uhelder an daoulin. Er Grennamzer e c’hounezet ar plant-se evit debriñ, en em signal hag ivez en em wiskañ.

☀️☀️ *Kit er-maez e straed ar C’homandant Avril ha kendalc’hit dre an hent-se.*

! *Gallout a rit tremen dre straed ar Chaloni Moreau ma fell deoc’h troc’hañ berr-ha-berr.*

Treiñ a-gleiz a ra straed ar C’homandant Avril. En tu dehoù d’ar groaz ez eus ur wenodenn a-hed an Oded hag a ya betek ur bradenn ma peur saout brizh-du, ur ouenn saout breizhat. Kendalc’hit gant ho pourmenadenn dindan gwez-derv kozh straed ar C’homandant Avril



1



2



3



4

ha neuze a-gleiz, en alez ar Banelloù.
Erruout a rit e straed ar Chaloni Moreau
a gemerit a-zehoù hag a-gleiz diouzhtu
war-lerc'h.

☀️ *E-tal ar wispiderezh, ar penn-iliz dibar
eus an arz roman a zispak e gevrennoù
en estajoù : an absidenn er c'hreiz,
an absidiolenoù a bep tu, brec'hioù
ar groazenn hag an tour karrez.*

👁️ **Ar skol broderez ar z**

Emañ ar skol broderez ar z - Pascal Jaouen
e-barzh ur savadur kozh eus ar vichererezh
feilhañs. Enni e kinniger kentelioù evit deskiñ
ar broderez « glazik » dreist-holl, hag ivez
diskouezadegoù gouestlet da arz al lien ha d'ar
broderez uhel er greizenn Baradoz-Paradis.

👉 *Treuzit ar straed ha kit diouzhtu a-zehoù
e banell ar Feilhañs. Treuzit ar reper Jules
Verlingue. Troit a-gleiz e straed ar Stivell. Setu
c'hwi war blasenn ar Stivell adarre.*

8 - Lougr an Oded

Pa ne vez ket o verdeiñ war-zu inizi Glenan e
tremen ar gouelier Coentinn ar goañv e Kemper,

da-geñver kal an Oded. Krog e oad da sevel an
teirgwern-mañ war alezioù Lokmaria e 1990,
ha bez' ez eo heñvel-poch ouzh ul lougr, unan
eus ar bigi aocherezh a verdee war an Oded
hag a-hed aodoù ar Meurvor Atlantel en 19vet
kantved evit dougen marc'hadourezh.

👉 *Kit dre dreuzell ar C'hab Horn.*

9 - Treuzell ar C'hab Horn

El lec'h-mañ, er Grennamzer, e oa ur pont-
gwint. Labezet e oa bet gant ur vag, ha distrujet
e 1740. Evit mont eus an eil ribl d'egile e raed
gant treizherien neuze. Gant diorroadur ar
feilhañserezhioù e oa bet ezhomm eus un
dreuzell met ret e oa bet gortoz betek 1954 evit
ma vefe lakaet er servij. Al lodenn fiñv-difiñv,
evit lezel ar bigi aocherezh da dremen, a veze
digoret gant un traouilh dre zorn.

☀️ *Awenet ez eus bet livourien ha
luc'hskeudennerien gant ar gwel adalek ar
C'hab Horn betek korzennoù an iliz-veur.*

👉 *War-lerc'h an dreuzell, kit a-gleiz war ar
C'hae Nevez ha kerzhit betek skwar an
Akadianed.*



5

1. Liorzh ar Prioldi
2. Lougr an Oded
3. Broderezh glazik
4. Buoc'h vrizh-du o peuriñ en ur bradenn

5. Eugène Boudin,
Porzh Kemper, 1857
© Mirdi an arzoù-kaer,
Kemper
6. Kastell Lanniron
7. Kêrig ar Gaz

6

10 - An halaj


Krog e oad gant chanter an hent halaj er bloavezhioù 1840. Gant ar savenn-douar-se e c'halle ar bigi bezañ ramoket diwar ar ribl gant kezeg, hag er mare-hont dija e oa ul lec'h pourmen eus ar c'hentañ. Graet ez eus bet ur c'hae eus ar metroù kentañ. Abaoe penn kentañ an 20vet kantved, ar c'hae Nevez a zegemer ar bigi da bourmen war an Oded. Pelloc'h, an tiez greunit savet e 1930 a ziskouez an obererezh industriel a oa eno : ar geoded micherourien-se a oa e-tal kichen an uzin gaz aet da get en deiz hiziv.

☀️ *E penn kentañ an hent halaj e tigor ar gwel war liorz, iliz ha prioldi Lokmaria war ar ribl all eus an Oded. War-lerc'h 2 km pourmenadenn ez eus ur gwel dibar war gastell Lanniron a oa annez-hañv eskibien Kerne gwechall.*

🔴🟡 *Troit en-dro ha kit gant kae an Oded. Da-geñver an dreuzell, treuzit ar straed e-tal ar stal a zo en un c'harri kozh eus penn kentañ an 20vet kantved.*



7





1. Poltred kozh karrdi an Oded

© Dielloù Kêr Gemper, 29 Fi
131 Dastumad Villard



2. Ti al leziou-barn

3. Tavarn-dañs kozh deuet da vezañ feilhañsez
rezh Fouilhen e-kreiz an
20vet kantved

“  Troit er c'hentañ straed a-gleiz, ar straed Joseph Hagen, ha kendalc'hit a-zehoù betek banell ar Gergozh a gratit ganti a-hed un nebeud metroù. Kit a-zehoù gant ar straed Anatol ar Braz.



11 - Ar c'harter Paogamm

Amañ e oa un abati a-hed an Oded er 17vet kantved. Edo he liorzhoù war an dinaou a-dreñv ar savadurioù. En 19vet kantved, Paogamm a stalias e spluseg war tachennoù kozh al leanezed. Reiñ a reas e anv d'ar c'harter-mañ, lodennet er bloavezhioù 1920.

“  Kendalc'hit gant ar straed Anatol ar Braz, ha goude-se a-zehoù, straed Louis Hemon hag a-zehoù c'hoazh, straed ar Palez a sko war tolzad gwezennek Menez Fruji.

12 - Ti al leziou-barn

Savet e oa bet ti al Leziou-barn en 19vet kantved gant François Lemarié, a oa bet ivez arkitektour ti-kêr Kemper. Awenet e oa gant an temploù gresian, gant kolonnennoù hag un talbenn ledan. Un astenn digoret e 2017 zo a-hed straed ar Palez.

“  Treuzit an hent ha kit gant kae an Oded a-hed an dour evit distreiñ d'ho poent loc'hañ.





UR MONT-HA-DONT

2,5 KM (UR WELADENN WAR-DRO 1E)

1. Gwerenneg tremen ar C'hleze

2. Jean-Julien Lemordant,
Kinkladur evit leti ar C'hleze
e Kemper, 1905-1909

© Mirdi an arzoù-kaer e
Kemper


ADALEK AR C'HEMBER, KEMERIT UR BILHED MONT-HA-DONT EVIT ERGERZHET KEMPER AN 19VET HAG AN 20VET KANTVED !

**Kempennet e oa bet ribloù an Oded
adalek an 19vet kantved da-geñver
donedigezh an tren da Gemper.
Degemer a reont savadurioù publik
ha perc'hennajoù prevez liesdoare.
Pa ergerzher ar c'haeoù hag an
treuzelloù betek ar gar e reer ur
bourmenadenn en arktektouriezh
hag ur veaj en amzer, eus ar Belle
Époque d'an Années folles.**

LOC'HAÑ EUS AR PONT PICHAT

1 - Ar pont Pichat

E 1858, evit donedigezh Napoleon III da
Kemper, e oa bet savet un dreuzell da-geñver
kember ar Stêr-Deir hag an Oded. Liammañ a
rae straed ar Park ouzh Tachenn an emgann,
plasenn ar Rezistañs bremañ, ma veze aozet
al lidoù ofisiel. Lesanvet e oa bet pont Pichat
gant Kemperiz abalamour d'ar staotlec'hioù
a oa eno. Gant bizit an Impalaer e oa bet



gallet reiñ lañs d'al labourioù da gempenn
ar c'haeoù war ribl dehoù an Oded evit an
dremeniri etre ar gar da zont hag ar porzh.

*Hedit an Oded dre straed ar Park ha
chomit a-sav en niv. 14, dirak leti kozh ar
C'hleze.*

2 - Tremen ar C'hleze

Savet e oa bet melloù tiez straed ar Park er
bloavezhioù 1870, el lec'h ma oa mogerioù-
kreñv. Da neuze e oa ribloù an Oded, gant o
gwez-kistin-Bourdel, ul lec'h hag a blijed kalz
d'ar vourc'hizien a chome pell war leurenn
tavarn ar C'hleze, unan brudet-kaer anezhi. E
leti ar C'hleze, er sal-debriñ, e oa un daolenn
vras livet gant Jean-Julien Lemordant diwar-
benn Breizh. En deiz hiziv ez eo miret e mirdi
an arzoù-kaer. Tremen ar C'hleze zo un tremen
toet aroueziek eus ar Belle Époque gant e
antre merket gant ur varkizenn metal ha gwer,
e werennegoù a-liv hag e leur gwisket gant
mozaikenoù.

*Kit e-barzh tremen ar C'hleze, kerzhit
a-hed ar palier ha kit er-maez e straed ar Park.
Kendalc'hit betek an niv. 8, ha kit e-barzh ar
porzh*



1



2



3

1. Pierre de Belay, Poltred

Max Jacob, 1933

© Mirdi an arzoù-kaer e Kemper

2. Lukanoù ha ar pinakloù prefeti

© Ministrerezh an Diabarzh-DICOM-cl.
Jérôme Groisard

3. Ar Sal Jean Moulin

© Ministrerezh an Diabarzh-DICOM-cl.
Jérôme Groisard

4. Sal ar c'hoariva Max-Jacob

5. Liorzh ar c'hoariva

3 - Ti Max Jacob

Amañ e oa ar familh Jacob o terc'hel ur stal broderezhioù, fardañ dilhad, hag hendraezoù. Er porzh a-dreñv emañ an atalier ma labourer ar vroderien vigoudenn. En ti-mañ en doa kresket ar barzh Max Jacob, ganet e Kemper e 1876. Da 18 vloaz e oa aet da studiañ da Bariz ha darempredet en doa ar vegenn eus arzourien e vare. Distreiñ a rae da Gemper bep hañv pe dost betek 1942. Daou vloaz diwezhatoc'h, abalamour d'e orin yuzev, e oa bet harzet gant ar Gestapo e Saint-Benoît-sur-Loire. Marvet e oa Max Jacob e kamp Drancy e 1944.

Kendalc'hit gant straed ar Park ha treuzit anezhi evit sellet ouzh ar prefeti a zo en tu all eus an Oded.

4 - Ar prefeti

En amzer an Dispac'h Bras e oa deuet Kemper da vezañ pennlec'h departamant Penn-ar-Bed. Melestradurioù an departamant, hag ar prefed nebeut war-lerc'h, a oa bet bodet en ospital kozh Santez-Katell a oa eno abaoe an 13vet kantved. Re enk e oa al lec'h evit ar servijoù, setu e oa bet digoret ur prefeti nevez e 1909. Savet e oa bet e beton-houarnet ha

kuzhet eo e framm a-dreñv fasadennoù hag a zegas da soñj eus kestell al Liger, gant un tour-korn, prenestroù kroazigellet, lukanoù kinklet gant togelloù ha pinakloù, war un doenn maen-glas uhel.

Treuzit ar pont Santez-Katell. E-tal deoc'h, er straed Santez-Katell, e chom c'hoazh meur a di o bannoù koad. Kendalc'hit dre ar boulouard Dupleix ha kit dre an dreuzell Max Jacob, dibar abalamour d'he forched houarn goveliet.

5 - An treuzelloù


An dreuzell Max Jacob a zoug enor d'ar barzh gant tammoù eus e oberennoù engravet en aspled. Ur grouidigezh vodern eo, ha kenderc'hel a ra istor an treuzelloù liammet ouzh emdroadur Kemper en 19vet kantved. Adalek ar c'hae e-harz ar ramparzhioù, an treuzelloù metal, brik pe beton zo a-c'haoliad war an Oded d'an dud da vont d'ar perc'hennajoù ha d'an uzinoù a zeu war wel da neuze war ar ribl all. Ar porchedoù hag ar plant a chom eo relegoù an implij prevez-se. E 1965 e oa bet toullet ar boulouard Dupleix, ha kollet o doa an treuzelloù o implij kentañ.




4




5

 *An eizh treuzell lerc'h-ouzh-lerc'h, eus ar prefeti d'ar c'hoariva, zo stag da vat ouzh skeudenn Kemper.*

 *Kit a-hed an Oded war ar boulouard Amiral Kergelenn. Pelloc'h eget pont ar Post, kemerit an dreuzell Canet-Malejag a-zehoù. Setu c'hwi erru er Pol Max Jacob.*


6 - Ar c'hoariva Max Jacob

Legadet e oa bet an dachenn-mañ d'an ti-ker evit sevel un ospis. A-benn ar fin e oa bet savet ur c'hoariva warni, un dra hag a vanke da gevredigezh bourc'hizien Kemper er Belle Époque. Digoret e oa bet ar savadur e 1904. Ur fasadenn simetrek en deus, sterniet gant daou vell pavilhon toget gant bolzioù-toenn kinklet gant zink. Dindan kement-se, an daou dimpan krag flammet zo kinklet, a-zehoù gant ur maskl hag a arouez ar gomediaezh, hag a-gleiz gant ul lourenn hag a laka da soñjal er muzik. Parañ a rae daoulagad an dud war an intronezed gwisket farv a errue en arvestoù dre ar skalier meur.

 *Kit a-zehoù d'ar c'hoariva betek antre al liorz.*

7 - Liorzh ar c'hoariva

Al liorz-mañ, e mod Bro-Saoz, a oa bet danzeet evel ur skrin evit ar c'hoariva. Reiñ a ra c'hoant da straniñ a-hed ur wazh-dour bordet gant tolzadoù plant benet e mod Japan. Pa'z eont a-hed an alezioù kromm, gant bankoù ha delwenoù amañ hag a-hont hag ur feunteun Wallace, e erru ar bourmenerien er rozeg. El liorz ez eus bet plantet e-leizh a wez eus ar Stadoù-Unanet hag eus Sina. Darn anezho zo ken kozh hag ar mare ma oa bet savet e deroù an 20vet kantved : ur sekoiaenn ramzel, magnolia, ur wezenn-dulipez Amerika, ur ginkgo biloba, ur siprezenn-ar-geunioù... Pelloc'h, an ti-jiminas kozh savet e 1905 zo unan eus lodennoù ar Pol Max Jacob. Er Pol sevenadurel hag arzel-se ez eus savadurioù-glad adimplijet hag emañ ivez an Novomax. Ar batis savet er mod a vremañ zo er reter d'ar c'hoariva ha degemer a ra ur sal sonadegoù muzik modern ha studioioù.

 *Kit e-maez al liorz dirak an Novomax. War ar boulouard Duplex emaoe'h adarre. Treuzit ar straed Aristide Briand ha kit gant bali ar Gar.*



1

1. Ar gar war-dro 1900
 © Diellou Kêr Kemper,
 29 Fi 1027
 Dastumad Villard

**2. 3. Houarnerezhioù eus
 kêrig Kergelell**

**4. Munudoù eus talbenn
 ar Gompagnunezh Lebon**

**5. Poltred kozh eus ar
 c'harri Renault**
 © Ouest France, dielloù
 tiegezh Nargeot, L. Christu

**6. François Bazin
 Merc'hed ar mor, 1935**

7. Fasadenn Ti Kodak

8 - Ar Gar

Lakaet e oa bet gar Kemper da vont en-dro e 1863. Savet e oa bet ar batis distok diouzh kêr evit gwareziñ yec'hed ha sioulded an annezidi. Adkemer a ra ar patrom treset gant ar Gompagnunezh Pariz-Orleañs : ur savadur simetrek, brik ha tufev, awenet gant arkitektouriezh ar 17vet kantved. Digoradur al linenn hent-houarn Naoned-Kemper, lañset gant ar Stad evit dienkañ an tiriadoù, a aroueze donedigezh an araokaat, ha reiñ a rae sav da labour-douar ar vro ha d'ar feilhañserezh. Klotañ a rae ivez gant digoradur ar vro d'an douristed.

••• Kuitait ar gar ha kit war-zu kreiz kêr dre ar straed Jakez Karter. Treuziñ a rit an Oded dre bont an Div Gerne.

9 - Merc'hed ar mor

Ar strollad-mañ kizellet er greunit zo bet savet gant an arzour François Bazin. Goulennet e oa bet digantañ gant ar Stad e 1935. E-harz ur peulvan, div blac'h e gizioù hengounel inizi Breizh a c'hortoz distro ar vartoloded. Emañ an hini goshañ en he c'hoazez, ganti emañ koef-kañv enez Sun ha paret eo he daoulagad war al leur. Ur plac'h eus Eusa en he sav a seblant sellet pizh ouzh an dremmwel gant

esperañs. Gant linennoù diginkl ha stilekaet ar c'hizelladur e touger enor da galon ha da emnac'h tud arvor Breizh.

••• Kendalc'hit gant ar boulouard Amiral Kergelell betek kêrig Kergelell.

10 - Kêrig Kergelell

Savet eo bet al lodennaoueg-mañ er stil Arz-kinklañ, ha diskouez a ra un arkitektouriezh dibar eus ar bloavezhioù 1930 gant kornioù kromm. Prenestroù, anvet bow-windows, a valir ouzh ar fasadennoù hag ar balkonioù o houarnerezh rikamanet

11. Ti Kodak

Savet e oa bet ti Kodak e 1933 evit ul luc'hskeudenner evel m'en gweler gant anv ar merk a zo c'hoazh war korn kromm ar fasadenn. Amañ e oa bet awenet an arkitektour eus Kemper Olier Mordrel gant ar meiziadoù modernañ a-fet an arkitektouriezh. Treset en deus ur batis beton-houarnet, gant ul leur-doenn, digorioù ledanoc'h eget ma'z int uhel, enframmet en ur vandenn pri-poazh glas a laka war wel al linennoù a-blaen.

••• Kendalc'hit gant ar boulouard Kergelell.



2



4



6



3




5


12. Melloù tiez ar bloavezhioù 1930

En tu all d'an Oded, ar c'harrdi kozh Renault, savet er memes mare ha Ti Kodak gant ar memes arkitektour, a ziskouez ur fasadenn simetrek gant linenoù geometrek, ar pezh a rae dezhañ bezañ modern ken-ha-ken. Emañ e-tal kichen ur mell ti klaseloc'h e greunit, sez ar gompagnunezh gaz Lebon ha savet e 1936. Al lizherennoù C hag L plezhennet, evit Compagnie Lebon, a c'haller gwelet war an talbenn e korn ar savadur.



7

 *Kendalc'hit gant ar boulouard Amiral Kergelenn ha tremenit dre liorz ar ramparzhioù evit distreiñ d'ho poent loc'hañ pe d'an iliz-veur.*

 *Adalek liorz ar ramparzhioù e weler ar voger-dro eus ar Grennamzer, outi palez an eskob, ha goude-se korzennoù an iliz-veur hag al lies a waregoù-bount a souten al lestr maen-se.*

« KEMPER JENTIL, NEIZH MA BUGALEAJ... EN
TRAOÑ, AN ODED HE LIES PONT HOUARN A
C'HOURGOUILH HEP FIN EBET.

... SKRIVAÑ A RAN HON DAOU GLOC'HDI
E LIZHERENNOÙ BRAS BLEUNIET, RUBANENNET,
LEUN A GRIADENNOÙ LABOUSED »

Max Jacob, tennet eus ar barzhoneg KEMPER, An arnodva kreiz, 1921.



Emañ Kemper e rouedad vroadel ar c'hêrioù hag ar broioù arz hag istor

E ministrerezh ar Sevenadur, renerezh an Arkitektouriezh hag ar Glad a ro an titl Kêrioù ha Broioù arz hag istor d'ar strollegezhioù lec'hel a ro buhez d'o glad Gant-se e vezer sur ez eo barrek an heñcherien-prezegennerien hag e reont traoù a-feson. En deiz hiziv, ur rouedad 202 a gêrioù hag a vroioù a ginnig deoc'h he chemet e Frañs a-bezh.

Titouroù, mirout plasoù

Ti ar glad

Servij buheziñ an arkitektouriezh hag ar glad
5 straed ar Barzh Kadiou
29000 Kemper
secretariat.patrimoine@quimper.bzh
www.quimper.bzh
02 98 95 52 48

Nepell

Kêrioù pe broioù arz hag istor eo Brest, Konk-Kerne, Dinan, Dinarzh, Felger, Gwenrann, An Oriant, Montroulez, Naoned, Pondi, Kemperle, Roazhon, Gwened ha Gwitreg.

Embann

Servij buheziñ ar glad e Kêr Kemper
Even 2020

Testennoù :

Claire Montaigne,
Buhezourez an arkitektouriezh hag ar glad

Troidigezh :

OPAB

Adlenn :

Ti ar glad

Skeudennoù : Ti ar glad, Kêr Kemper, nemet hag un dra all a vefe skrivet

Danzen grafek

Servij kehentiñ Kêr Kemper diwar DES SIGNES studio Muchir Desclouds 2015

Moullañ

Ti-moullañ Cloître

Deuit da vezañ ur fan !

Adkavit Ti ar glad war ar rouedadoù sokial. Resevit keleier diwar-benn an abadennoù sevenadurel hag ar gweladennoù ! Ha ma 'z eo plijet hon obererezh deoc'h, lezit 'ta ur gerig war Tripadvisor



VILLE
DE QUIMPER

